


## Lettre d'information n°146 -Mai 2026

**La médiathèque sera ouverte : le samedi 2 et le samedi 9 mai  
mais sera fermée : vendredi 15 et samedi 16 mai  
à l'occasion du pont de l'Ascension.**

### Exposition bande dessinée "A la ligne" de Julien Martinière d'après le roman de Joseph Ponthus Du mardi 5 au samedi 30 mai




C'est l'histoire d'un ouvrier intérimaire qui embauche dans les conserveries de poissons et les abattoirs bretons. Jour après jour, il inventorie avec une infinie précision les gestes du travail à la ligne, le bruit, la fatigue, les rêves confisqués dans la répétition des rituels épuisants, la souffrance du corps. Ce qui le sauve, c'est qu'il a une autre vie. Il connaît les auteurs latins, il a vibré avec Dumas, il sait les poèmes d'Apollinaire et les chansons de Trenet. C'est sa victoire provisoire contre tout ce qui fait mal, tout ce qui aliène.

Cette exposition présente une sélection de planches originales d'*À la ligne*, adaptation du roman de Joseph Ponthus, la première bande dessinée de Julien Martinière. Auteur et illustrateur, il a publié des livres pour la jeunesse et a reçu de nombreux prix, dont la pépite d'or du meilleur album au SLPJ de Montreuil (2018).

Tout public - gratuit

### Lecture musicale « A la ligne : hommage à Ponthus » Par Clotilde de Brito Samedi 30 mai à 14h30



Ouvrier intérimaire, Joseph embauche jour après jour dans les usines de poissons et les abattoirs bretons. Le bruit, les rêves confisqués dans la répétition de rituels épuisants, la souffrance du corps, s'accroissent inéluctablement comme le travail à la ligne. Ce qui le sauve, ce sont l'amour et les souvenirs de son autre vie, baignée de culture et de littérature. Par la magie d'une écriture drôle, coléreuse, fraternelle, l'existence ouvrière devient alors une odyssee où Ulysse combat des carcasses de bœuf et des tonnes de bulots comme autant de cyclopes. La lecture d'extraits par Clotilde de Brito est soutenue par la musique électronique d'Arnaud Samson : un rythme martelé, des cadences répétitives, des mélodies lancinantes, tout un univers sonore qui rencontre celui de la « machine-usine » et vient appuyer la puissance des mots.

Voix : Clotilde de Brito  
Musique : Arnaud Samson

Adultes et adolescents - durée : 50 min - gratuit

« À la ligne » de Joseph Ponthus est édité à La Table ronde, 2019.

## Bébés lecteurs mardi 19 mai à 9h30 et 10h30



Deux séances : de 9h30 à 10h15 et de 10h30 à 11h15

Les bibliothécaires du secteur jeunesse initient les tout-petits au plaisir des histoires.

Pour les 0-3 ans – durée : 45 min - gratuit

Sur inscription auprès du Relais Petite Enfance 06.71.90.34.76

## Heure du conte "Les mystères de l'ouest" Jean-Marc Derouen Mercredi 20 mai à 15h



Les conteurs ne sont pas des menteurs ! Mais quand Jean- Marc raconte des histoires qui lui sont vraiment arrivées, on plonge dans le fantastique, l'irréel, l'innommable... Voyage périlleux en Brocéliande, en baie de Douarnenez, en pleine mer face au vaisseau fantôme ou dans le Beltane des Sorcières.

Ses contes basculent sans prévenir du rire aux larmes, de la tradition au contemporain. Jean-Marc Derouen est l'auteur de plusieurs livres de contes, dans lesquels il partage sa créativité et son imagination débordante. Retrouvez ses histoires dans des albums et livres audio à la médiathèque.

Ce spectacle s'inscrit dans le cadre d'un travail autour des contes dans les écoles de Guingamp.

Tout public – durée : 45 min - gratuit


## Heure du conte : un mercredi sur deux à 15h A partir de 4 ans - gratuit



### Mercredi 13 mai

Conte : « Les deux grenouilles à grande bouche » Pierre Delye

C'est le déluge! Deux grenouilles à grande bouche ont rejoint les autres animaux sur le grand bateau. Mais au bout de 240 jours, tout le monde craque! Les grenouilles chantent faux et fort et sans arrêt...



### Mercredi 27 mai

Pause lecture : « Eloge de la lenteur »

Face à l'agitation du monde extérieur, si on prenait enfin le temps ?




Médiathèque de Guingamp  
1, Place du Champ-au-Roy  
22205 GUINGAMP Cedex  
02 96 44 06 60  
[mediatheque@ville-quingamp.com](mailto:mediatheque@ville-quingamp.com)  
<http://mediatheque.ville-quingamp.fr>

## Lizher-kelaouiñ niv.146 - miz Mae 2026

**Digor e vo ar vediaoueg : d'ar Sadorn 2 ha d'ar Sadorn 9 a viz Mae  
met serret e vo : d'ar Gwener 15 ha d'ar Sadorn 16 a viz Mae abalamour  
d'ar Yaou-Bask.**

**Diskouezadeg war "À la ligne", bannoù-treset gant Julien Martinière  
diwar ur romant gant Joseph Ponthus  
Eus ar Meurzh 5 d'ar Sadorn 30 a viz Mae**




Kontañ a ra istor ur micherour hag a labour a-fracadoù e-barzh friturioù ha lazhtioù e Breizh. Sevel a ra ar renabl a zeiz da zeiz, en ur mod resis-kenañ, eus ar jestroù a vez graet pa vezer o labourat ouzh ar chadenn, eus an trouzioù, ar skuizhder, an hunvreoù lamet digant an den dre forzh adober ar memes traoù faezhus, eus poanioù ar c'horf. Deuet eo a-benn d'en em dennañ abalamour m'en deus ur vuhez all ouzhpenn. Anavezout a ra anvioù ar skrivagnerien latin, fromet eo bet gant Dumas, desket en deus barzhonegoù Apollinaire ha kanaouennoù Trenet. Evel-se en deus gallet bezañ trec'h, evit ur frapad, war an holl draoù poanius dindan veli.

En diskouezadeg-mañ e roer da welet un dibab plankennoù orin eus ar bannoù-treset kentañ savet gant Julien Martinière, diwar ar romant *À la ligne* gant Joseph Ponthus. Skrivagner ha skeudennaouer eo. Embannet en deus levrioù evit ar re yaouank ha gounezet meur a briz, evel ar Valzenn Aour evit an albom gwellañ da-geñver Saloñs al levrioù hag ar c'hazetennoù evit ar re yaouank (SLPJ) e Montreuil (2018).

Evit an holl - digoust

**Abadenn lenn gant sonerezh « À la ligne : hommage à Ponthus »  
Gant Clotilde de Brito  
Sadorn 30 a viz Mae da 2e30**



Joseph zo ur micherour hag ac'h a eus an eil deiz d'egile da labourat a-fracadoù e friturioù ha lazhtioù e Breizh. An trouzioù, an hunvreoù lamet digantañ dre forzh adober ar memes jestroù faezhus, poanioù ar c'horf, pep tra en em gav bern-ha-bern a-benn ar fin, evel al labour ouzh ar chadenn. Gallet en deus en em dennañ gras d'ar garantez ha d'an eñvor eus e vuhez all, lec'h m'eo bras plas ar sevenadur hag al lennegezh. Graet en deus gant ur mod skrivañ hud, livet gant ar fent, ar gounnar hag ar garantez evit ar re all, a laka e vuhez micherour da vezañ evel troioù-kaer Odiseus, ma vez o'n em gannañ ouzh kargasenoù bevined ha tonennadoù kigi-mor re-bar da sikloped. Tennadoù a vo lennet gant Clotilde de Brito, asambles gant sonerezh elektronek graet gant Arnaud Samson : ur bed sonioù dibar eo, gant luskoù ha taolioù o tistreiñ dalc'hmat ha tonioù evel pistigoù, ma reer anaoudegezh gant ar sonioù eus bed ar « mekanik-uzin » abalamour da reiñ muioc'h a bouez c'hoazh d'ar gerioù.

Mouezh : Clotilde de Brito    Sonerezh : Arnaud Samson

Tud deuet ha krennarded - padout a ray 50 munut - digoust

« À la ligne » gant Joseph Ponthus zo embannet gant La Table ronde, 2019.

# Babigoù lennerien Meurzh 19 a viz Mae eus 9e30 da 10e30



Div abadenn : eus 9e30 da 10e15 hag eus 10e30 da 11e15

Al levraoueger-ien-ezed e rann ar yaouankiz a laka ar re vihanañ d'ober anaoudegezh gant an istorioù hag ar blijadur a vez da-heul.

Evit ar vugale 0-3 bloaz – digoust – padout a ray 45 munut

Ret eo lakaat hoc'h anv en a-raok en Erlec'h Bugaligoù  
06.71.90.34.76

## « Ur wech e oa... » : "Misterioù ar c'hornôg" gant Jean-Marc Derouen Merc'her 20 a viz Mae da 3e goude kreisteiz



Ar gonterien ne gontont ket gevier ! Pa vez Jean-Marc o kontañ an istorioù en deus bevet evit gwir avat e splujer e bed ar faltazi, an diwirion hag an traoù n'eus anv ebet dezhe... Ur veaj dañjerus ec'h eo etrezek Breselien, e bae Douarnenez, en donvor e-tal ul lestr tasmant pe e-kerzh Beltan gant sorserezed zoken.

Gant e gontadennoù, pe e vent hengounel pe a vremañ, e vezer lakaet da c'hoarzhin ha da ouelañ a-bep-eil. Jean-Marc Derouen en deus skrivet meur a levr kontadennoù evit degas e faltazi virvilhus d'an dud all. Gallout a rit lenn e istorioù e-barzh albomoù ha le-vrioù klevet er vediaoueg.

Kinniget eo an arvest-mañ da-geñver ul labour graet asambles gant ar skolioù e Gwengamp diwar-benn ar c'hontadennoù.

Evit an holl - digoust - padout a ray 45 munut

## « Ur wech e oa... » : bep eil Merc'her da 3e goude merenn Adalek 4 bloaz



### Merc'her 13 a viz Mae

Kontadenn : « An daou ran o begoù bras » Pierre Delye

Dour-beuz zo ! Div ran o begoù bras zo en em gavet asambles gant an holl loened all war ar vag vras. Met goude 240 a zvezhioù n'eus loen ebet ken evit gouzañv anezhe pelloc'h ! Ar raned ne zihanont ket da ganañ faos hag a-bouez-penn...

Merc'her 27 a viz Mae

Ehan lenn : « Meuleudi d'ar c'horregezh »

Ar bed diavaez a vez war virvilh bepred, ha ma klaskfemp kemer amzer a-benn ar fin ?



Mediaoueg Gwengamp  
1, Plasenn Maez ar Roue  
22205 GWENGAMP Cedex  
02 96 44 06 60  
[mediatheque@ville-guingamp.com](mailto:mediatheque@ville-guingamp.com)  
<http://mediatheque.ville-guingamp.fr>